

Dafar / kevelerezh

Bretagne Culture Diversité – Sevenadurioù

Breizh, sevenadurioù da lodenniñ... Bretagne Culture Diversité – Sevenadurioù zo ur gevredigezh hag a ginnig lakat dafar ha gouiziegezh a-zivout Breizh hag he sevenadurioù liesseurt en amen d'an holl.

Evit an dra-se e vez savet geti un troc'h ostilhoù : arloadoù hezoug, filmoù...

www.bcd.bzh

KUB

KuB, KulturBreizh, zo ur media enlinenn embannet get ar gevredigezh Breizh Créative.

Kinnig a ra KuB kantadoù a brogrammoù bleinskrivet, digoust ha "hirlost" : teulfilmoù, filmoù faltazi berr, arvestoù bev, filmoù bevaat, klipoù sonerezh a vremañ, lennadennoù...

KuB a laka anat an traoù a-leizh a vez krouet e Breizh, ur vro stad enni get he sevenadurioù, he yezhoù ha digor àr ar bed. KuB a skriv a-ziàr arzourion ag ar bed a-bezh é tremen dre Vreizh hag a-ziàr ar bed a-bezh dre hanterouriezh he arzourion veajour.

En ur bed é cheñch hag en deve da daliñ doc'h enkadennoù bras emañ rekis ar sevenadur, muioc'h evit biskoazh, evit empentiñ asabl un amzer-da-zonet kumun. KuB a verk mennantez ar vro àr tachennoù ar sevenadur hag ar mediaoù nevez.

www.kubweb.media

www.kubweb.media/golfe-du-morbihan-vannes-agglomeration-coedition

Mediaouegoù ar Mor Bihan

E lec'hienn Internet Mediaouegoù ar Mor Bihan (ur rouedad 24 mediaoueg) e c'hellit sellet doc'h ar c'hatalog, gober anvedigezh get dibaboù ha taolioù-from al levraouegerion, lenn deiziataer an abadennoù. Dafar zo e stumm niverel ivez, evel ar VOD, al levrioù niverel pe ar c'hentelioù enlinenn.

Dafar dibar ag ar glad dizanvezel (videoioù, sonioù, skridoù, skeudennoù ha kement zo) a c'heller sellet doc'hte er mediaouegoù ivez, digoust hag hep koumanant.

www.mediathequesdugolfe.bzh

KDSK

Dre ar brezhoneg pe dre ar galleg e c'hellit gwelet pegen puilh eo dalc'had arbennik KDSK diàr-benn Breizh, ar brezhoneg, ar Broioù Keltiek, ar glad sevenadurel... An danvez lennegel embannet e brezhoneg hiziv an deiz a ya d'ober un darn vras ag an dalc'had, digoret bras ivez àr lennegezh Breizh e galleg hag àr lennegezh ar yezhioù keltiek arall. E-tro 18 000 teul en holl a zo da sellet àr al lec'h, muioc'h evit 400 a gelaouennoù a zo diellaouet ivez. Niverelaat a ra KDSK skeudennoù, skritelloù ha teulioù kozh ag an domani foran evit pinvidikaat an dalc'had teuliaouiñ enlinenn dre Internet. Dre niverelaat an teulioù-mañ – dibaot pe re vresk alies evit bout dornataet – e vint anavet get an holl.

kdsk-crcc.wixsite.com

Tamm Kreiz

« Tamm Kreiz, deiziataer ar festoù-noz hag ar festoù-deiz, doareioù a-ziàr ar strolladoù, an arzourion, ar bagadoù, ar c'hevrennoù keltiek... ».

www.tamm-kreiz.bzh

Petra Neue

Petra neue (Petra nevez) a vo 25 blez a-benn fin 2020. Krouet e oa bet ar gevredigezh evit bout ur rakstal ag al lañs sevenadurel er vro, evit e vrudiñ hag e gas àr-raok, dre ginnig stajoù, atalieroù brezhoneg, kan ha sonerezh (telenn, bombard, akordeoñs...) ha dastum er c'hornad.

Get ar gevredigezh e oa bet savet Gouel ar Roue Warog (diàr anv ar roue breizhat kentañ a Wened) get ar soñj aoziañ ur prantad pouezus en-dro d'hor glad dre liammañ lañs sevenadurel hag ekonomikel, get skoazell oc'hpenn 120 kevelour.

www.petraneue.com

Roue Waroch

Goude 25 blez emañ daet Roue Warog da vout ur gouel ha n'heller ket tremen hebioù dezhañ, ur gouel sevenadurel a galite, digor àr ar bed, àr sonerezh ar re yaouank hag àr ar muzik kanet e Breizh. Dre m'emañ ar sonadegoù hag ar stajoù e prizioù marc'hadmat e vez aesaet ar c'hejadennoù etre ar rummadoù oad dishañval. Setu m'emañ daet Roue Warog da vout ur gouel sevenadurel ha n'heller ket c'hwitiñ, ur gouel darempredet get mil arvester bennak, 12% anezhe é tont a ziavaez ar c'hwec'hkogn ha 23% a ziavaez Breizh istorel. En arbenn a skoazell Mor Bihan tolpad ha Rannvro Breizh e lakomp àr wel krouadennoù sevenadurel ag ar vro, ar pezh zo a bouez evit ma chomo hor glad sonet ha kanet a-feson. 252 a dud zo ezel ag ar gevredigezh, en o mesk 45% a Bleskob, 40% a Wened ha 25% a labour er-maez a vro Gwened. Ha just a-walc'h e oa bet un den yaouank a youl vat é estlammiñ en ur lâret e oa daet Roue Warog da vout gouel broadel Bro Gwened.

www.petraneue.com

Radio Bro Gwened

Ur Radio Bro hollek ha divyezhek zo anezhi, ma labour kazetennerion, animatourion a vicher hag animatourion a youl vat, a bep seurt oad, evit skigniñ doare ag ar gwirvoud tostañ hag hep disoñjal hani.

Adkavit RBG e burevioù Ti ar Vro, Straed al Lezenn, e Gwened.

www.facebook.com/rbg56

www.radio-bro-gwened.com

Plum'FM

Plum'FM a zo ur radio gevredigezhel bet savet 30 vloaz zo en IME Pluveleg. Hiziv an deiz e vez kaset en-dro get 40 animatour.ez bennak a-youl-vat, ur C'huzul-meriñ ennañ 12 ezel ha 6 implijad.ez pad. Skigniñ a ra ar radio 7 devezh àr 7 ha 24 eurvezh àr 24, àr gwagennoù mat ar frekañs 102.1 ha dre al lec'hienn internet plumfm.net.

Plum'FM a seven ur gefridi sokial nes pa ro ar gaoz da 3 000 den bennak bep blez ha pa vez brudet geti àr-dro 500 abadenn aozet er vro ; ur gwir labourva skingomz zo anezhi, digor da razh an dud, ul lec'h ezteurel dibar, e kreizig-kreiz un tiriad àr ar maezoù, e servij ur vro hag ar geodedizion ;

Plum'FM a zifenn ar gallaoueg, yezh rannvroel a Vreizh, ha sevenadur ar Vro C'hallou, ha klask a ra o zalvoudekaat, o mirout hag o zreuzkas dre skigniñ oc'hpenn 14 euriad programmoù bep sizhun ; bep blez e aoz ar radio paot mat a atalieroù skingomz (er skolioù, e-maez ar skolioù, àr dachennoù an obererezh sokial ha mezegel, gwarez barnerezhel ar yaouankiz, en annezioù evit an dud oadet) ; roiñ a ra pouez d'an dizoloadennoù sonerezh, sonerezh ag ar vro hag a lec'h arall, un dibab dibar a vez alejet geti, pell doc'h an tonioù anavet hag hep bruderezh ; ar radio labelaet get ar rouedad MAIA zo ivez ul lec'h titouriñ evit kevredigezhioù ar c'hornad, get ur Gefridi Degemer ha Titouriñ ar C'hevredigezhioù.

Selaou Plum'FM a zo kement ha skoazelliñ ur media mod arall, frank, emouestlet, stad ennañ get e ziforc'hioù ; ur media ag ar vro savet genoc'h hag evidoc'h.

www.plumfm.net

Adkavit kronikennoù plum'fm :

- Anet j'aprend le galo : Kronikennoù divyezhek evit deskiñ gallaoueg, tematek ha distag an eil re doc'h ar re arall. Baleit dre ar pennadoù ha selaouit doc'h an temoù a garit ! 132 bennad zo podskignet.
- www.plumfm.net/ Janetjaprendlegalo
- L'orine des mots : Régis Auffray, kelenner, aozour ur geriadur hag ur yezhadur ag ar gallaoueg, a zispleg dimp e-pad 5 munut razh ar pezh a zo da ouiet a-ziàr ur ger, e orin, e emdroadur hag e zistagadur. En ur mod pedagogel ha bourrus. www.plumfm.net/lorinedesmots
- Toupichon Dastum : Kronikennoù evit anavout un ton sonerezh, ur sonenn pe ur gontadenn tennet diàr dielloù Dastum ar glad dre gomz e Breizh.
- www.plumfm.net/le-toupichon-dastum
- Toupichon o l'z anciens : Kronikennoù dastum gallaoueg e-mesk tud kozh en annezioù tud oadet

ar Mor-Bihan ha dreist-holl e annez an Div Roc'h e Serent.

- www.plumfm.net/letoupichonolzanciens
- Toupichon 3 mots : Ur gallaoueger pe ur c'hallaoueger a ro da glevet an tri ger gallaoueg a blij ar muiañ dezhoñ/dezhi doc'h mikro Plum'FM.
- www.plumfm.net/le-toupichon-3-mots

Plum'FM é eune radio souétiere qi fut crayée à l'IME de Pieumelè ni'a 30 an d'ça. Anet, ni'a pu d'touéz douzene d'animou.ere benvoulant.e, ni'a un consail de menerie de 12 membr, e pés c'é etou eune demi-douzene de monde gaijè. La radio evâille séz programme ao long de la journée e ao long de la smene su lz'onde du 102.1 e su l'emplla plumfm.net.

Plum'FM assure eune mission sociale entour de yèle péq'o aqheuille 3000 bone jens châqe anée e o couvere 500 évènement den l'paiz. C'é eune radio-laboratouère ouvèrte à tertout. C'é eun'endret de dizance (espréssion) come i'enn a pàs ghere, eune'endret den la campagne, qi cerche à sèrvi le tériouère e séz dmeurant.

Plum'FM assure eune mission sociale entour de yèle péq'o aqheuille 3000 bone jens châqe anée e o couvere 500 évènement den l'paiz. C'é eune radio-laboratouère ouvèrte à tertout. C'é eun'endret de dizance (espréssion) come i'enn a pàs ghere, eune'endret den la campagne, qi cerche à sèrvi le tériouère e séz dmeurant.

Ecouter Plum'FM, c'est soutenir un média alternatif, libre, engagé, fier de ses différences; c'est soutenir un média local fait par et pour vous.

www.plumfm.net

Erterouéz léz cronique de plum'fm :

- Anet j'aprend le galo : Croniqe francéz-galo pour aprendr...le galo. Châqe cronique porte su un sujet e peut s'acoutè à sn'apart, pourmenez vouz don den léz paissée e chouéziséz don qheu sujet qe vouz vléz acoutè ! 132 paissée sont en podcast su www.plumfm.net/ Janetjaprendlegalo
- L'orine déz môr : Régis Auffra q'é enseignou, aotou d'un motier d'galo e d'eune gramére, i nouz espliqe en 5 minute tout qhi qi faot savai su un mot, sn'orine, son enmorfozrie e léz maniere de l'parfètè, e tout ça de maniere pedagojique e s'amuzant. su www.plumfm.net/lorinedesmots
- Toupichon Dastum : Croniqe pour decouvri eune ére de muziqe, eune chanson ou ben eune contée tirée dz'archive du patrimouène "dit" de Bertaigne de Dastum su www.plumfm.net/le-toupichon-dastum
- Toupichon Dastum : Croniqe pour decouvri eune ére de muziqe, eune chanson ou ben eune contée tirée dz'archive du patrimouène "dit" de Bertaigne de Dastum su www.plumfm.net/letoupichonolzanciens
- Toupichon 3 mots : Un.e caoze-galo mourmoune éz oraille de Plum'FM touéz môr d'galo q'il/ol eme ben e nouz dit pourqhi su www.plumfm.net/le-toupichon-3-mots

Emglev Bro Gwened

« Emglev Bro Gwened » a dolp kevredigezhioù sevenadurel breizhek a vro kêr Wened evit labourat asambles àr-dro diorren, harpiñ, brudiñ ha skigniñ sevenadur Breizh e kement stumm a zo, ar brezhoneg en o mesk. Aesaat a ra ar genskoazell, ar c'hehentiñ hag ar c'henober etre e izili.

Kefridioù an emglev :

- Tolpiñ obererion sevenadur Breizh.
- Dileuriiñ kevredigezhioù sevenadurel Breizh, kendiviz / aliñ.
- Brudiñ obererezh ar c'hevredigezhioù ezel : Lizher-kelaouiñ, lec'hienn Internet.
- Roiñ lañs da oberoù kumun ha neveziiñ.
- Kas sevenadur Breizh à-raok dre hor c'hornad-bro : raktres bro hag e Ti ar Vro, koulzad sevenadurel...
- Treuzkas : kentelioù brezhoneg, abadennoù er skolioù, predegennoù,...

« Emglev Bro Gwened » a stroll kevredigezhioù sevenadurel breizhek eus bro Gwened evit labourat asambles war diorren, harpañ, brudañ ha skignañ sevenadur Breizh e kement stumm a zo, ar yezh en o mesk. Aesaat a ra ar c'henskoazell, ar c'hehentiñ hag ar c'henober etre he izili.

Diàr an 31 a gevredigezhioù ezel ag Emglev Bro Gwened, 9 zo staliet e Ti ar Vro : Babigoù Breizh, Bodadeg ar Sonerion Bro Gwened, Dazont ar Glad, Diato Folies, Skol-Uhel ar Vro, KDSK (kreizenn dafar sevenadurel keltiek), Mignoned ar brezhoneg, Radio Bro Gwened ha Stumdi.

www.facebook.com/tiarvrobrogwened

tiarvro-bro-gwened.bzh

Ti ar Vro Bro Gwened – Maison de la culture bretonne du Pays de Vannes

Emglev Bro Gwened a dolp kevredigezhioù sevenadurel breizhek e kornad-bro kêr Wened evit bout asambli é tifenn, brudiñ ha skignañ sevenadur Breizh, e kement stumm a zo, ar yezh en o mesk, evit aesaat ar genskoazell, an darempred hag ar c'henober etre e izili.

9 c'hevredigezh diàr an 31 a zo ezel ag Emglev Bro Gwened zo staliet e Ti ar Vro :

Babigoù Breizh, Bodadeg ar Sonerion Bro Gwened, Dazont ar Glad, Diato Folies, Skol-Uhel ar Vro, KDSK (kreizenn dafar sevenadurel keltiek), Mignoned ar brezhoneg, Radio Bro Gwened ha Stumdi.

www.facebook.com/tiarvrobrogwened

tiarvro-bro-gwened.bzh

Mignoned ar Brezhoneg

Ur benveg evit ar brezhoneg. Mignoned ar brezhoneg zo e servij ar gevredigezh keodedel hag ar bed ekonomikel evit brudiñ ar brezhoneg.

Dait da welet Mignoned ar Brezhoneg e Ti ar Vro, Straed al Lezenn, e Gwened.

mignoned.bzh

Dastum

Dastum, saveteiñ, treuzkas ar glad dre gomz e Breizh a ra ar rouedad puilh a gevredigezhioù a genlabour evit meriñ an dastumadurioù graet get kantadoù ha kantadoù a zastumerion abaoe 50 vlez zo pe dost (sonennoù, kontadennoù, mojennoù, sonerezh, danevelloù buhez...). Ingal e embann Dastum oberennoù dave a-zivout ar glad dre gomz (levroù, CDoù) hag ur gelaouenn he anv Musique Bretonne ivez. »

www.dastum.bzh

Office Publik ar Brezhoneg

Un Diazevadur Publik a Genlabour Sevenadurel (DPKS) zo anezhañ. Un aozadur ofisiel eo, bet savet get ar Stad, Kuzul-rannvro Breizh, Kuzul-rannvro Broioù-al-Liger ha kuzulioù-departamant Penn-ar-Bed, ar Mor-Bihan, Aodoù-an-Arvor, an Il-ha-Gwilen hag al Liger-Atlantel.

Brudiñ ar yezh hag he skoazelliñ d'em zispakiñ àr holl dachennoù implij ur yezh zo e-mesk e gefridioù pennañ.

www.fr.brezhoneg.bzh

Confédération Kenleur

A-c'houde 1950 e ra Kendalc'h àr-dro kevredañ razh an obererion a bled get sevenadur Breizh evit ma pado en amzer. Derc'hel d'an talvoudoù, d'ar gouiziegezhioù, o lodenniñ get re arall evit ma vo treuzkaset an hêrezh-se ha ma emdroio a-unvan er gevredigezh a vremañ. 70 vlez zo e vez Kendalc'h é tastum hag é studial, hag ur c'hevread dave eo evit kement tra a denn da Glad Sevenadurel Dizanvezel Breizh hag an dañsoù hengounel dreist-holl.

Ne servij da netra berniñ ma ne vez ket korvoet frouezh an enklaskoù, dre o embann peotramant dre ober gete evit kenderc'hel get chadenn ar c'hrouiñ, ar pezh hon laka dre ret da stummiñ hon izili evit ma vint mistri àr ar chemet hag an teknikoù : « bout gwriennet don zo gelliñ tapout awen en douaroù kozh. »

Ha dre m'emañ ken pouezus arall dizarbenn an traoù, e lakomp bec'h àr ar c'helaouiñ d'an holl hag an treuzkas, dreist-holl trema ar vugale, hag int piaouerion hor sevenadur... Embann a reomp teulioù pedagogel hag a c'hell bout implijet er skolioù. Hag àr-lerc'h e vo « da bep unan, pa vo daet ar c'houlz, da glask gouiet pe da chom diouizieki ».

Kendalc'h n'eo ket ur framm emvastiñ, e lec'h en deus er Geoded, en arbenn ag e nerzh kinnig, dre ma krou liammoù sokial ha ma tifenn e dalvoudoù. Soñjet eo hon obererezh evit padout, evit ar c'hendalc'h na petra 'ta.

www.kenleur.bzh

Le Gouren

« Bodadeg ar Gouren zo ur c'hevread sport da vat »

Ur sport a-gozh eo ar gouren ha gouiet ec'h eus e emdroiñ evit ma tay da vout ur sport modern, just-evel ar sportoù emgann arall. Un hêrezh eo ag hon hendadoù kelt hag un elfenn hollbouezus a sevenadur Breizh. Bodadeg ar Gouren zo karget da dreuzkas ar sport-se d'ar rummadoù hiziv hag àrc'hoazh evit ma c'hello padout. Dre gendiviz emañ dileuriet Kevread Frañs ar Gouren get ar ministrerezh evit stil gouren Breizh hag e Bodadeg ar Gouren emañ bet fiziet an emrenerezh hag ar garg da veriñ ar stil-se.

Ar gouren, sport ha c'hoari a-gozh e Breizh, a c'heller pleustriñ e [Gwened](#), e [Sant-Nolf](#)... peotramant pa vez kinniget abadennoù diskouez ha tañva get Bodadeg ar Gouren.

An dud a vicher e bed ar sport a c'hell goulenn stummadurioù : [Ti ar Gouren](#).

- [Le Gouren en numérique](#) sur bcd.bzh
- [La Fédération de Gouren](#) sur www.gouren.bzh
- [La Fédération de Gouren](#) sur www.gouren.bzh
- [Le Gouren en numérique](#) sur bcd.bzh

La FALSAB

Savet e oa bet ar F.A.L.S.A.B. e 1930 ha troet e oa bet en ur c'hengevread er blezadù 1990. Ar seurt « Kenvodadeg c'hoarioù ha sportoù hengounel Breizh »-se zo enni un tregont framm ezel bennak hiziv an deiz :

- Bodadoù ha Kevreadoù c'hoarioù ha sportoù hengounel,
- Frammoù àr an dachenn sokiosevenadurel, touristel hag àr dachenn an deskadurezh pobl,

Mont a reont razh d'ober ur rouedad strewet dre bemp departamant Breizh ha kornad-bro Pariz.

Pal ar c'hengevread zo brudiñ razh c'hoarioù ha sportoù hengounel Breizh (c'hoarioù bouloù, paledoù, kilhoù ha c'hoarioù diàr ar maez), harpiñ izili ar rouedad evit kas an diskiblezhoù àr-raok. Ezel eo a veur a framm sport rannvroel hag a bled get sevenadur Breizh ; ur park dudi en deus ivez, hag a zo gouestlet da c'hoarioù hengounel Breizh, e anv « Louarnig Park, skluz c'hoarioù Breizh », bet digoret e miz Ebrel 2018 er Mor Bihan.

Meur a raktres a vez kaset àr-raok get ar FALSAB er mare-mañ, evel lakat an UNESCO da enskriviñ ar c'hoarioù hag ar sportoù hengounel àr marilh gwellañ pleustroù ar Glad Sevenadurel Dizanvezel, a-gevret get meur a vro ag Europa.

www.louarnigpark.bzh

www.facebook.com/confederation.falsab

Bali Breizh / Frañs 3 Breizh

Adkavit razh abadennoù Bali Breizh e france3-regions.francetvinfo.fr/bretagne/emissions/france-3-breizh

Breizhoweb

Breizhoweb zo ur chadenn skinwel digoust dre Internet. Skigniñ a ra programmoù hollek e brezhoneg, istitlet darn anezhe e galleg.

A-hed ar blez e kinnig Breizhoweb kantadoù a brogrammoù e brezhoneg evit an holl : tresadennoù-bev, filmoù sinema, stiradoù skinwel, filmoù-bevaat, programmoù pedagogel, talk-shows, teulfilmoù, c'hoarioù skinwel, magazinoù sonerezh ha sevenadur ha sitkomoù e brezhoneg zoken.

Edan kevrat get Kuzul-meur ar c'hleweled emañ ar chadenn skinwel Breizhoweb ha mont a ra en-dro get skoazell rannvro Breizh ha meur a zepartamant a Vreizh.

Noz-deiz e c'heller gwelet programmoù ar chadenn e lec'hienn Internet Breizhoweb

www.breizhoweb.bzh

Ar Skol Departamantel

E miz Gwengolo 2007 e oa bet digoret kevrenn sonerezh hengounel Skol Departamantel Kêr Wened. A-c'houde he digoradur, get kenlabour [Bagad Melinerion Gwened](#), ec'h eus bet krouet liammoù get a bep sort obererion sevenadurel breizhek a Wened (Bagad, Kevrenn geltiek Gwened,...) hag an tolpad-kêrioù (Roue Warog, Kreizenn Sokiosevenadurel an Elven, bagadoù,...).

Er gevrenn-se ec'h eus àr-dro 120 skoliad a gemer kentelioù akordeon, bombard, binioù, taboulin sklent skosat, kan, treujenn-gaol, binioù-bras, telenn geltiek, small pipe hag uilleann pipe, àr donioù breizhat, skosat hag iwerzhonat.

Kevrenn sonerezh hengounel ar skol departamantel a venn bout un oberour sevenadurel oberiant evit lakat he hêrezh da vevañ en he stummoù kozh ha nevez hep ankouaat monet davet ar sevenadurioù hengounel daet ag an embroidañ pe davet sonerezhioù arall kelennet er Skol Departamantel.

www.mairie-vannes.fr/conservatoire

GWENED MELL-DROAD IWERZHON

Klub Gwened Mell-droad Iwerzhon a oa bet savet e miz Eost 2008. Labourat a ra ar gevredigezh evit brudiñ ha diorren mell-droad Iwerzhon e douar Gwened.

Ezel eo a Gevread Mell-droad Iwerzhon, edan bleinerezh ar GAA (Gaelic Athletic Association) hag a ver an holl gluboù en Europa dre an ECB (European County Board).

Maskotenn ar c'hlub zo un toukan, an evn hag a zo arouez ar merk bier brudet ag Iwerzhon, Guinness. Liv

prun ha liv orañj eo livioù ar c'hlub.

Er pleustr : bep sizhun e vez gourdonadegoù gant ar c'hlub ha kemer a ra lod e krogadoù a vignoniezh hag e tournamantoù a bep seurt, evel re Kevre Breizh Mell-droad Iwerzhon.

Degouezh a ra dezhoñ aozioù pe kemer perzh e krogadoù, eskemmoù ha stummadurioù àr Mell-droad Iwerzhon (Stummadurioù gourdonerion, tredeogiezh, deskoni hag abadennoù er skolioù...).

vannes-football-gaelique.com

Bagad de Vannes

Bagad Gwened zo da gentañ razh un avantur denel. Hini hogozik 300 ezel hag a laka ar gevredigezh da vevañ dre o engouestl evit aozioù ha kas ur yoc'had oberoù da benn, pe dre gemer lod er pleustradegoù hag en abadennoù sonerezh dirak an dud. Bagad Gwened zo engouestlet kaer er vuhez sevenadurel ha kevelet get meur a abadenn aozet er vro. Dre e sonaozennoù e kinnig dimp gober anavedigezh get sevenadur Breizh. Bec'h a laka Bagad Gwened é stummiñ sonerion, rak birvidik e chomo ar gevredigezh keit ha ma vo gellet kas ar skol sonerezh àr-raok evit kenderc'hel da bleustriñ sonerezh Breizh. Bagad Gwened a oa bet anavet e dalvoudegezh foran e 2017. An anavezadenn-se he deus roet kred hag enor d'ar strivoù bet graet hep ehan e-pad 60 vloaz e servij sevenadur Breizh. Dre m'eo ar gevredigezh nemeti er c'hornad hag he deus bet an anavezadenn-se e red he brud e kêr Gwened, en tolpad-kêrioù ha zoken dre Vreizh a-bezh ha gwell-a-se evit razh ar bagadoù.

www.bagad-de-vannes.com

Sonerion Bro Gwened

Depuis sa création, Sonerion Bro Gwened anime un projet axe sur les expressions et musiques bretonnes, ancre auprès des habitants du territoire, porteur de sens et d'utilité sociale.

Adhérente à la fédération nationale, Badadeg Ar Sonerion, elle en partage les buts : développer l'enseignement de la musique et la pratique collective au sein des bagadoù et des couples de sonneurs ; favoriser sa diffusion par l'organisation de manifestations festives ; plus largement promouvoir les bagadous, le patrimoine breton, sa culture et sa langue auprès de la population.

La fédération fédère les sonneurs des bagadoù du Morbihan autour de ses valeurs. Depuis la rentrée 2020/2021, SoneriOn Bro Gwened en lien avec la direction départementale de l'Éducation nationale du Morbihan expérimente un projet inédit, les Klas bagad. A travers ces classes, La DSDEN et SoneriOn 56 affirment leur volonté de rendre accessible la culture à tous les élèves. Enfin, dans le cadre du dispositif « dé clic » proposé à tous les professeurs des écoles élémentaires de l'intercommunalité G.M.V.A., SoneriOn bro Gwened s'est associée aux bagadoù de Vannes et d'Elven pour co-construire un module de 6 à 7 interventions sur le thème de la découverte d'un bagad.

sonerionbrogwened.bzh